


Feiz-ha-Breiz



EBREL 1927



Hag e vefec'h 'vel eur wezenn, hep deliou glaz na frouez,
Dre zour nerzus ar binijenn, c'houi a vleunio a nevez.

FEIZ HA BREIZ



- EO
- KOZA
- KAERA
- HA MARCHADMATA
- KANNAD MIZIEK SKEUDENNET
- A CHELL KAOUT
- AR VRETONED

FEIZ HA BREIZ a gav der zigor e kement ti kristen e vez komzet ennan brezoneg.

Er bloaz 1926

FEIZ HA BREIZ EN DEUS EMBANNET :

- Sklerijenn war Vreiz, gant E. ar Moal.
- Kentelioù d'ar Merc'hed, gant Tintin Anna.
- Prezegennou, gant J. Buleon, J. M. Breurec, P. Thomas.
- Kelennadurez kristen, gant an A. n' Eskob A. Duparc, Y. Uguen, Ronan ar C'horr.
- Istor Breiz ha Buhezioù tud vras a Vreiz, gant G. P. J. Buleon, Anna Sevellec, Y. M. Coadou, F. Mevellec, Y. Uguen, Y. V. Perrot.
- Enklaskoù ha Kenstrivadegoù, gant Ch. Lemarie, J. A. Mary, L. Bleunven, L. ar Goff, Yann an Dantec, Jakez Doumpap, Anna Youenou, Hervé ar Bras, March'arid Gourlaouec.
- Keleier, gant J. Kerrien, Y. Brochen, Y. Perquis, P. Guillou.
- Peziou-e'hoari, gant Dir-na-dor.
- Soniou ha Gwerzioù, gant an Tad 'n Helgoualc'h, Paotr Treouze, Job ar Bayon, Jak ar Marechal, J. M. Breurec, Yvon Kerouedan, Kergroz, Hal-Wyn, Ab-Sulic.
- Marvailhou ha Romanchou, gant C.C.C., Mabig Breiz, Breizadig, Melegan, Loeiz ar Floch, Dir-na-dor.
- Studiadennoù war ar yez ha barnedigezioù war al levrioù nevez, gant F. Vallée, Y. Uguen.
- Taolennou ha skeudennou, gant L. ar Guennec, Janed Malivel, Yvon Floch, O. Pauvert.

BRETONED, SKIGNIT FEIZ HA BREIZ en dro d'eoc'h, ha sankit ar wirionez-man doue en ho spered : el lec'h ma vale ar brezoneg e vale Breiz ; el lec'h ma ne vale ket ken'ar brezoneg, livirit ar pezh a geroc'h, eno, ne 'z eus mui, eus Breiz, nemed ar skeud ha netra ken.

Setu amañ an dek parrez a zo bet lennet ar mui a FEIZ HA BREIZ enno edoù ar bloaz 1926 :

- | | | | | |
|---------------|----------------|------------------|----------------|----------------------|
| 1 - Sant Pabu | 3 - Plougin | 5 - Sant Divy | 7 - Goulec han | 9 - Lannarvily |
| 2 - Kernilis | 4 - Treouergad | 6 - Lok-Brevaler | 8 - Plougerne | 10 - Ar Vourc'h Wepp |

Enor d'ar parrezioù-ze a zalc'h, daoust d'ar gwall avel, kersouñ ha ma reont, banniel Feiz ha Breiz en e zao ; enor d'ezo ha trugarez

Er Bloaz 1927

FEIZ HA BREIZ a vezo kalz kaeroc'h c'hoaz; kreski a ralo eus an hantec; e vint a vezo an hini a voe roet d'ezan pa voe krouet, er bloaz 1865, hag a vras eped 19 vloaz. Digor e vezo n'eo ket hepken **D'AR PEVAR BREUR**, da lavaret eo da vrezoneg Leon, da hini Treger, da hini Kerne ha da hini Gwened, met ivez da hini Bretoned Breiz-Izel o deus rannet dekdi brezoneg, nann, siouaz, war harlenn o mammou, met e levrioù; daoust da-ze, gwelid a reoc'h, e ouzont en em denna gant ar brao bras, hag bep diaz Breiz a ouzo en em glevet eus an eil penn d'egile da Vreiz ha n'o devez ken strez nemed eur feiz, eur yez, eur galon.

FEIZ HA BREIZ a ralo **TRO VREIZ**; embann a ralo, gant taolennou dispar, studiadennoù war hon Iliz-meur, hor chapelou, hor c'halvarioù, hon tenorioù a bep stumm hag a bep danvez; padra a vezo gantan da ober eul levr evel ma n'eus ket bet moulet c'hoaz hini ebet ker kaer e brezoneg. N'eo ket 40 skrivagner eo a skrive ennan er bloaz 1927, met 50, da nebeuta.

Daoust da-ze e vezo ker marchad mat ha biskoaz. Da gemeret, en hor mouleze pe en hon ties-gwerz, diouz an niverenn, ne gousto nemet 4 real hepken. Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemeret nemed eun niverenn hepken, eo 13 lur ha 10 lur hepken, dre bez, pa gemeret da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ - HIZO KENTOC'H EBET MARCHAOZ

O kas ar priz anezan hag hoc'h adres, dre ar post, d'an A. Geogelin, 4, rue du Château, Brest, C/C 44.40, Rennes. Kenavo, lennerien vat ha krenvroz ker, ha bennoz Doue d'eoc'h.
Plougerne, d'an 8 a viz Keru 1926.

Y. V. PERROT,
Rener « Feiz ha Breiz ».

Ma karit ho pro evel ma livirit

LENNIT

SKIGNIT

HĀ MIRIT

Feiz ha Breiz

KANNAD MIZIEK AR VRETONED

Evel an holl draou kaer all,

Henman, evit kosaat, ne gollo tamm ebet e dalvoudegez.

Skridou a gavoc'h ennan ha ne vezont embannet nemet pennad er miz-man, pennad er miz-hont, evel roman nevez ar skrivagner brudet Dir-na-Dor.

Dismantr Jerusalem

ha


Tro-Vreiz

Kemerit hen, eta, bep miz, ha goude beza e lennet, mirit hen e korn hoc'h armel ; divezatoch ho pugale vihan o do plijadur ouz e lenn. Lakit ar re n'hen anavezfen ket c'hoaz d'e gemeret. Da bep pobl eo lenn hag harpa he yez.


D'eomp ni, eta, Bretoned eo lenn hag harpa hor skridou brezonek.

E diabarz an iliz, ar pezh a sko da genta al laged eo bez sant Gwilherm, ar gouloù o skedi en dro d'ezan, dalc'mat. Gwilherm a deus er bed, e Sant-Alban, diou leo hanter diouz Lamball, er bloaz 1184; hen eo a lakeas en donar maen kenta an iliz veur a welomp c'hoaz; mervel a eure er bloaz 1224, hep bez gallet dont a-benn eus e labour, met lavaret en doa e peurlch'raje e iliz-veur, *« non pe es-uro, ha der'chel a reas d'e c'her, rak kement a vuzudou a c'hoarvezas war e vez ma lakeas Innosant IV e ano war roll ar Zent er bloaz 1247; gant profou ar bardonerien a deus d'e bedi e c'hellus an hini a gemeras e garg a eskob war e lerc'h, peurlch'raje ar vali el lec'h m'oa bet sebeliet. O lenn enklask ar prosse grand evit e lakat war roll ar zent e welomp e roas ar gwelet da elciz a re zall, ar c'hlevet da elciz a re vouzar, ar c'hoiz da elciz a re vul, ar c'herzet da elciz a re zounnet, ar pare da elciz a glanvourien hag ar vuhez zoken da veur a hini maro.*

Keur an iliz veur a zo bet graet er XIV^{em} kant-ved; war vegellou ar volz e weler skoued Guy a Vonfort, eskob er bloaz 1353. Adreñv keñ an aoter vras, ehanz treid sant Stephan e weler skouedennet, en eur tu, diou c'had, en o neiz, hag en tu all, eun anezez hag he hini bihan o peuri, peb a



He veur sant Brieg, diouz an a-drav.



Bez an A. de la Romagère 1817-1841.

gloc'hig ouz o gouzoug. An eskob Jaffrez Rohan, a zavas, vardiou ar bloaz 1375, eur chapel d'an Itron Varia — N. D. de la chereche — a dreñv keñ an aoter vras, hag a lakeas olier eur volz war ar chapelou krouz e weler warni c'hoaz eskouejou. En dro d'ar c'heñv e kaver eur chapel all diar, Werchez, — N. D. de la Blanche, savet ar bloaz 1329 gant Blanche d'Azangour, c'hoar an Aotrou d'Avangour, a oa neuze eskob e Sant-Brieg; chapelou all c'hoaz a zo eno hag a zo bet savet vardiou ar bloaz 1480 gant an eskob Kristof Penmarc'h eus a Zant Fregant e skouejou a weler c'hoaz war ar volz.

E tu ar c'hrestez, en traon d'ar chapel krouz, emañ chapel ar Zakramant a zo emañ bez sant Gwilherm; Yann Prijant, ginidik, a greder, eus a vaner Krec'hkelenn, e Gwikourvest, eskob e Kastell-Paol hag hanvet goudeze da vont da Zant-Brieg, er bloaz 1450, eo a reas sevel ar chapel-ze; gwelet a rear e skoued a-zioch an nor a zigor war an derezioù da vont da leordi ar chaloniad. Olier ar C'hastell leonad evedan, ginidik eus a Landunvez, hag eskob war e lerc'h, a zo e skouejou ivez war veñ-vegel ar volz. Keñ an aoter a zo bet kizellet, er bloaz 1706 gant ar c'huzeller brudet Corlay eus a Gastellaudren ha kalz a zo hag a lavar eo e gaera pezh-labour; ar pezh a ziskouezer emañ eo an Ael Gabriel o lout da gemenn d'ar Werchez Vari e vezo mamm da Zoue. E chapel ar Spered Glan emañ ar maen-font. Bal greiz an iliz, a zo bet adsavet en XVIII^{em} gant eun eskob ginidik eus an Auvergn, Louis Fretat de Boissieu; distar ha paour eo da welet, sur a-walc'h, e skoaz ar

c'heñv; met an eskob a en em ziezias c'hoaz kalz evit he sevel hag anez ma voe brokus, en e genver, ken ne vije deuet a-henn da bae e labourerien.

Sant Gwilherm, maro d'an 29 a viz gouere 1234 a voe lakat war roll ar zent d'ar 15 a viz ebrel 1247. Hen eo kenta breizad, bet embannet e zantelezh gant ar Pab; e vez koz a oa bet savet er bloaz 1470; e vez neuze a zo bet savet en amzer an Aotrou 'n eskob Fallières; warnan e weler, daoust pegen ubel ha peger stank eo an dreñv a ra an dro d'ezan, an eskob santel hag e ziaouarn kroaziet.

Eur maen-bez all, gant eur skouedenn warnan, a gaver eno c'hoaz hag eo hini an A. 'n eskob Andre Le Porc de la Porte, maro er bloaz 1632 ha bet sebeliet, da genta, e ti an Ursulinezed; digaset eo bet eno er bloaz 1833 ha lakat war bez an Aotroued Boisselin. An eskob Iouer Jacob, maro er bloaz 1801, a zo harp, en nor a zo da vont er c'heñv, pa 'z aer emañ diouz an tu kleiz; eur maen marbe du, hep ano ebet, a zo warnan; gourvezet eo bet eno harp ouz reilegou unan a oa bet eskob en e rak, an A. Thepault ar Breignou, bet ganet e Montroulez, er bloaz 1703 ha maro er bloaz 1766. An A. Caffarelli, a voe eskob warlerc'h an A. Jacob, a zo bet sebeliet e bez an A. Denis de la Barde, eun eskob all maro er bloaz 1675.

Oc'h oher tro an iliz veur e kaver c'hoaz bez an A. 'n eskob Mathias Le Groing de la Romagère, ginidik eus a eskopli Moulins ha maro er bloaz 1841. Ar bez-ze a zo bet graet gant ar c'huzeller

brudet Oge. An A. de la Romagère a oa bet en amzer an Dispac'h, o verzeria pell hag hir amzer, war goz listri Rochefort.

Kaout a rear bez an A. Le Mée 1841-1858 a gent-pennas e iliz hag a zavas eur c'hloerdi nevez, lae-ret, siouaz, abaoe; bez an A. David, — eur gall, eus a Lyon, mignon bras ar Vardez, 1862-1882 — hag a zo bet skouedennet warnan ker brao e benn, leua a vadelez hag a spered, gant Chapuis.

Ar gador-brezeg a zo eus ar XVII^{em}; armet an ogrou a zo kosoc'h hag a zo bet kizellet gant kalz a ijin. Etouez an taolennou kaera da welet e c'heller lakat ar c'huzeller livet gant Jouvenet ha daou diskleriet war unan anezeo.

Ma ne vir ket an iliz veur bez sant Brieg, — a zo bet dismantret abred, da gredi eo, — e vir, da vihanan, eun nebeud eus e reilegou; ar re a rea Tro-veuz a bede kalonek dirazo hag a-raok mont pelloc'h e tiskenment betek Itron Varia ar Feunteun savet a-zioch elcennenn Porz-Aurel, el lec'h m'en doa sant Brieg, rakal m'oa digouezet er vro, savet e genta Penit. Eur feunteun gaer a oa eno gwechall, savet e mein kizellet ker kaer hag hini ar Folgoat; an dispac'h a zo tremenet hag ar pezh a zo chiomet eus e zilerc'h a zo blonset; daoust da ze e weler c'hoaz, war ar veñ, lera, puchet aman hag anont ha gwecklevi e sav skourrou eus o genta a ra, ker brao ha tra, an dro d'ar wareg savet a-zioch mellezour an dour.

G. P.



He veur sant Brieg, diouz an a-drav.

KLEMMOU AN AOTROU DOUE (1)



AR GOUELVAN WAR GORF AN AOTROU KRIST

(Divar eun daolen graet e Padoua gant Giotto wardro ar bloaz 1365)

O va fobl, petra 'm' eus me graet d'it, ha penaos em eus gallet da zonia kement-se ?

Lavar d'in. Da ziframmet am eus eus an Ejipt, daoust hag an dra-ze eo en divije graet d'it kompenn eur groaz evaloun ?

Doue santel, Santel ha krenv, Santel ha divarv, ho pet truez ouzomp.

Epad daou ugent vloaz em eus da vleitet er gouzerti ha da vaget gant bara an nenv; goudeze out bet kaset ganen en eur vro hag e oa emi douar eus ar gwella ; daoust hag evit hoza bet ker mat-ze en da genver eo ez peus kompennet eur groaz d'az Salver ?

Doue santel, Santel ha krenv, Santel ha divarv, ho pet truez ouzomp.

Petra a oa d'it d'in da ober o'hoaz evidout ha n'em defe ket graet ? Da lakel en eus en donar, evit ar gerra eus va gwintennou ha ne peus roet d'in, en dizro, nemet e'honvoni, rak da deri va sec'hed ne peus kavet ken tra da rei d'in nemet gwin trenk ha gand eun taol goaf e peus toullet kaon da Zalver.

Doue santel, Santel ha krenv, Santel ha divarv, ho pet truez ouzomp.

er mor ruz ha te ez peus va stlpet eire daouarn ar veleien vras.

O va fobl.

Diraont em eus digoret ar mor ha te gand eur goaf e peus digoret va c'hostez.

O va fobl.

Me 'm eus baleet arazouli, en eur goumoullenn ha te ez peus va stlpet da Lez-varn Pilat.

O va fobl.

Me 'm eus da vaget gant bara an nenv, er gouzerti, ha te peus roet stavadou d'in ha taoliou skourjez.

O va fobl.

Me 'm eus torret da zec'hed d'it gand dour skler o lont eus ar garreg ha pa oan diravet gand ar zec'hed e peus roet d'in bestl ha gwin trenk.

O va fobl.

Evid ober vad d'it em eus diskaret rouaned Kanaan ha te e peus skoud war va fenn gand eur gorzenn.

O va fobl.

Me 'm eus roet d'it gwalc'h ar rouaned ha te peus...

ETRE KREISTEIZ HA TEIR EUR

Digouezet war ar C'halvar, Jezuz a voe diframmet digantan e zihad ha noz, evel eur preavig douar, ec'h en em astennas war ar groaz; evit m'en divije nebeutoc'h da c'houzenn e voe kinniget d'ezan eur banne myr-win; e danva a eus, met, en aoun da goll e anaoudege, ne falvezas ket gantan hen eva. Tachou bras a dreuzas e zaouarn hag e dreid; ar wezen ruz hen douge a voe dibradet ha lakel, gant he frouez, da zavel er vamm; an daou laer a voe savet o c'houzouli, harp en e hini, evit lakaat komz blasas da zont da wir: « Ar Mesias a vo lakel war an hevelep renk gand an dorfetourien. »

Hag hen a oa e kreiz: e kreiz etre daou loen, gwechall, e Bethleem, war ar c'holo, e wele kenta; e kreiz etre daou laer, breman, e tal Jerusaleim, war ar groaz, e wele diveza.

Na pebez gwel estlammus an hini a velet ens. Kreisteiz bennak e c'helle bezan; an heol en e wir wella a galle tamm ha tamm e sklerijen evit ma vije eur fallenn warnann.

Ken hubak ha tra Jezuz a lavaras: « Va zad, pardonit d'ez, rak ne ouezet ket, petra reont ! » (1)

O Madeleze sebezus ! petl a ra n'eo ket hepken evit ar zoudarded o devoa e staget ouz ar groaz, met ivez evit ar Juevien ha tud fall an holl gantvelou tremenet ha da zont ha n'int ket evit gouzav ar gwel hepken anezan.


A-zioe'h e henn eur skritell, e hedroeg, e yez e-man, o gresch, yez anavezet gand kalz hag e latin, yez tud Rom a rae o mistri er vro, a roe da c'houzout piou e oa ha perag e varve: Jezuz Nazared, Roue ar Juevien.

Ar vouzveien a jome e tal ar groaz; ehoan a dilent e-harz ar c'houzouli ken na vije maro o zorfetourien en aoun ne deuje unan bennak d'o diskrouga a-raok o zremenn; hervez lezenn Rom, dilhad ar re a veze lakel d'ar maro a oa d'ez; pevar e dant; en em lakat a rejont da ranna ken etrezo dilhad Jezuz ha re an daou laer, met Hor Zalver en doa eur zae, hep gvari, graet d'ezan gand 'e vamm, ha ne c'helle ket ober tammou anez her he c'holl war net; tennet e voe d'ar ploaz her da velet gand piou ez oje.

Emira ma renne ar zoudarded ar pez a oa kouszet gand, e boulin, e oa eno hiniennou, etouez ar bobl munut hag a dole disnegans war Jezuz: « Te, emezo, eo an hini a lavare o as gonest, war da veno, da ziskar Templ Doue ha d'e zevet a-never e tri devez; en em denn a c'halase breman ha netre, mar d'out mab Doue !... » (2)

An darn vrasa eus an dud koulskoule a jome sioul, sechet; an dra-ze a lakae pennoz bras k'er da youchal gwass ma c'hellent, en eur heja o diskoaz: « Saveteit en deus ar re all ha n'eo ket evit en em zavetel e-unan ! Mar d'eo ar Mesias, evel ma lavar ha Roue Israel, n'en deus ken da ober breman nemet diskenn eus ar groaz ha netre karek gantan, rak da deuo 'ta d'hen tenna ac'han p'eo gwir e lavare: em eo Mab Doue » (3).

(1) Lukaz XXIII. 34. (2) Maza XXIII. 34. (3) Maza XXVII. 61.



Ar zoudarded o-man a c'hoaze d'ezan: « Mar d'out Roue ar Juevien diskenn ac'halase breman ! » hag e kinniget d'ezan da eva.

Al laer kleiz zoken a youc'he: « Mar d'out ar C'halist, en em denn ac'halase breman ta ha n' d'az heul ! » (4) Met an hini dehou a gemere truez outan hag a lavare: « Aotrou, n'ann ankoume'hait ket pa vezo c'h digouezet en ho rotanteleze » (5).

Ha Jezuz a lavaras d'ezan: « Hilio en ed-etur o vezi ganen em baradoz » (6). Setu penaos e c'hellas al laer dehou, laer betek penn, evit n'hell lavar ker bras sant angustin, laercz zoken e varoloz.

An denvaljenn a greske; an dud strattulhet o velet penaos e troe annez ar en em dennez; e hant e dreid koulskoude, Jezuz a c'halle gwelet e vamm, Mari Madalen, ha Yann, an abostol munia karek hag e lavaras d'e vamm o tiskouez d'ez Yann: « Maouez, setu aze da vab » ha da Yann o tiskouez d'ezan e vamm: « Setu aze da vamm » (7).

Adalek netre an denvaljenn a wass hag a vennas ivez gallet e Jezuz: « Va Doue, va Doue, emezan, perag ho peus c'houz va dilere ! » (8) ha den goude her c'helljed o lavaret: « O ! na me 'neus sec'hed ! » (9) E gvirionez, dre ma kollit o gwad sec'hed ar re veze staget ouz ar groaz a greske kement m'o laket da vervel; o klevet ar glennadenn-se, ar zoudarded a lakeas eun tamm spoue bet sonhet en eur banne gwin trenk e beg eur skoure hag hen louskerkent: « Ena graet ganen pep tra ! » (10). Distaga a eure eur youc'haden vras ha goude ar c'houzout-mant: « Va zad etre ho touarn e c'houc'hemenn va ene ! » (11) e lezas e denn, hag en doa dalc'het sonn betek netre da gouez hag e tennas eun huadenn all: tremenet oa.

Noz du oa war menez Kalvar, e Jerusaleim, er Jude ha dre holl ha d'eo nemet teir eur. Pallenn bras an Templ a en em rogas dre an hant; an donar a gressas; ar vein a fraillhas; tud santel maro petl a oa a en em ziskouezas e Jerusaleim; Juevien deiz a grene gand o c'haez hag a skoe war o c'halon; ar c'hanterenn e-man o tiskenn eus ar C'halvar e ker a lavare: « Hep mar bet, al den-man a oa dilamall ! » (12).

Ar bet a-ber a oa e kanv da vab ar baradoz.

(1) Lukaz XXIII. 34. (2) Lukaz XXIII. 34. (3) Lukaz XXIII. 34. (4) Yann XIV. 26. 37. (5) Maza XXVII. 65. (6) Yann. XIV. 26. (7) Lukaz. XXIII. 46. (8) Lukaz. XXIII. 47.

LEONIZ, da zul ar C'hasimodo a-zeu eo eman bodadeg vras ar Gatoliked, e FOLGOAT, n'hen ankoume'hait ket !

Savet eo eus a varo da vec, Alleluia !



e zaouarn; douget o devoa, war o diskoaz, betek al liorz, ar c'horf leun a c'houllou, a c'hwad, a boullfrem hag a c'honezenn. Dirag an Itron Varia, kalonek ha glacharet, gant skoazell ar Merc'hed Santel, o devoa diskoimet ha kribet ar lileo hirr speget gand ar gwad ha klizez an daoulagad; gant dour ar puns ha gand o daerou o devoa gvalc'het ar c'horf hag e lioret en eul linsel nevez a oa fuilhet warni kant lizir myr hag aloes; goude beza rodelllet eur maen braz da stanka dor ar ar bez, ez ajont kuit, diouz an abardaez, ken doaniet holl, ma venent koueza, pa zigoueze gand o zreid steki, hep gouzout d'ezo, ouz mein rodell ar wenojenn.

D'ar zadorn, dez bras Pask ar Juzevien, ne deus den wardro ar bez, met antronoz, d'ar zul, kerkenet ha sav-hool, abred, abred, Mari Madalen, Mari mamm Jakez ha Salomea a gerze etretek al liorz, emtrez en o c'halon, daerou en o daoulagad. Podadou c'honez vat ganto, etre o daouarn, da valzami Jezuz. Met eun Ael, ker gwenn e zilhad hag an ereh, a lavaras d'ezo: « Jezuz, an hini a glasket, n'eman ket aman, savet eo a varo da vec, evel m'en doa lavaret; en ho raok e vezo er Gallie hag eno her gweloc'h, alleluia, alleluia. »

Trech eo bet Jezuz da fallagriez an dud; kaer o dez bet ober d'ezan gwasan ma c'hellent n'int ket bet evitant; trech eo bet d'ezo: Gwener ar groaz eo bet o dervez; ar Zul Pask eo dervez Jezuz. Da gwen ar deiz-se, nag a galonou a drid dre garantez evitant; an dour e-unan a wisk e zilhad kaera da gana e veuleudi; ar pezh a zo glas, n'eo ket bet biskoaz ker glas; ar pezh a zo alouret, n'eo ket biskoaz ken alouret; ar pezh a zo skler, n'eo ket biskoaz ker skler; dre holl eman ar c'han, hag ar c'hleier, o seni eun eil tour d'egile, a ro da c'houzout d'an holl eman Jezuz o sevel eus a varo da veo e eleiz a eneo kristen, Alleluia, Alleluia!

Naontek kant vloaz a zo m'eman an dud fall oc'h ober gwasan ma c'hellent da Jezuz; atao e kaver Judaez d'her gwerza, dre eur pok; Pilate, d'her c'has d'ar maro, en aoun da goll o c'hargou, mevelien da skei gantan diwar e voch, evid plijout d'o mistri; ailloned, a vil vern, da dufal war e benn; skried ha pharisiand, adroned dre zindan, o lakat pennadou er holl d'e stleja d'ar maro!

Kaer o devoz ne vezint ket evitant; pa gav d'ezo eman er bez evid atao eman a-zivoc'h o fenn beo huhez-ke o sellet outo hep m'o gveffent.

Gwener ar groaz eo dez ar gwir flastret dindan an treid; sul Fask eo gouel ar gwir trech d'ar bed!

Kleier skintin Pask, sonit pell ha sonit kaer, da laouennaat an dud hag ar hoblou a zo er gwask; an Aotrou Krist a zo savet eus e vez, Alleluia! Alleluia!

Yo! e gwirionez, savet eo, Alleluia, Alleluia!

Ahaoc ar gwener da noz edo gourvezet, dindan ar roch, etouez ar c'honez vat, Joseph ha Nikodem a oa deuet a-benn da lemml an tacho eus o dreid hag eus



DISMANTR JERUSALEM

Lia ne da tamm he sonj gant he breur, Mel kerken, e savas ar goullenn-man eu he spered: « Petra a lavaro va breur eus va gwelidigez? » Hag o teuas er-mez eus he c'hamb, he c'halon o lammet en he c'hreiz. Azer a distajas outi hag he brietas gant tenredigez.

— Ah! seblant vat, emezan; mar daut ken yach ha ken diskiz evel m'eo luf ha fresk da viskamant!

— Diskuz ou! emezi.

— Doare nec'het a gavan 'zo warnout, evelato... D'arost hag eur c'helou fall bennek oc'h eus bet...?

Sonj Herodez a deue d'ezan.

— Te a lavare d'in n'az pos gret nemet eun hun? — Gwir eo, met va hun a zo bet kentoc'h eus hunvre, pe, evit lavaret gwell, eur veledigez eo an eus bet... Gwelit em meus... ar Mesias nevez ganet... — He monez a gomas o listaga an tri ger diweza. — D'e dro, Azer a chomas diabar. — Ha kement a levez, emezi, an eus gouzout evit epad va novez, ma 'm eus ranket gouela, rakal pa 'm eus klevet, ha netra ken, an hano anezan, gouela gant keuz ha gant estlamm!... Ha te lavar 'z eus bred eo ganet?

Kelou ebet! emezi; n'am eus gwelid na klevet den, abaoe m'oum bet en em d'adlet da gonsket, dech da noz!

— Trouz ebet n'en deus da zihmet er beure-man? emezan, seferad.

— Trouz ebet!

— Brudou Bethleem, kniskoude, n'o deus ket lavet epad an noz, hag er beure-man... N'ech euste ket klevet, emezan, ez eus ganet eur Mesias?

He gwelid a reas neuze o c'hench lian hag o ehom mantret holl, divalvennet he daoulagad, spouron ha levezet mesket war he dremm, demigor he gouel, evel da gomz, hep ma ranne gir.



Gwelit em eus eur ar Mesias nevez ganet

— Oh! emezan, arabad d'it bezan ken strallhet se! Me lavar ez eus ganet unan, met marizez ez eus ganet daou!

Hag en em lakas da c'hoarzin.

Lia a gasas he dour d'he daoulagad hag a guzas he dremm. Daerou puilh, ne oute eus a belec'h, na savet d'ez en eun trol, ma redent a-dreuz d'he bized. Komz Azer en doa evel distan- ket warno hag o doa, plou oar? en em zastumet a kerz an noz, ha bremen ne oa ket ken evit o mird. Mezek an tamm anez, dre ma c'helle an holl he gwelid o outa, e reas sin da Azer da zont ganti en he c'hambre.

Pesot nevezint 'zo ganez? emezan, gant eur vouez enkreget bras. Ober a reas sin d'ezan da c'hedal ken m'he dije gallet stanka war he daedou. Chomet 'n e zav en he c'hichen, hen a zelle talarok outi ha ne oute petra da zontal. Goude eur pennad, he gwelas, evelkent, o trei outan adarre.

— Ah! emezi, gant eur mouezhoarz henvel ouz eur bur-hool goude eur gaouad gho, pesourt talvoudigez he deus a wechou eur gomz hepken! — Ober a reas eur poz: N'ouzout ket, emezi, petra 'zo c'hoarvezet ganez fenez?

Ne respontas ket nemet goullenn diganti: — Kont d'in da veledigez!

N'ho c'houez, he daouarn kroaziet, en em lakas hi neuze da zisklari- rian d'ezan an hunvre burzudus, he sellou d'ez en he raok, evel ma dremenje dirazi a-nevez, ar pezh a zerevelo. Azer a zelaas hag a zelle vezz outi.

A-nebeudou, he dremm a deus da splannaat, evel pa vije bet eur goullou o paran, en he di- barz; he c'hoarzo a deus da vevan enfant hag a gomas stank eus he ger-rou. Ha neuze souden, oc'h estennas he diou- vrec'h, 'vel m'ho devoa gret, e diboun he hunvre, hag, evel ar gomz, he daedou eo a strinkas adarre henvel ouz eur berrad arne.

Mantret holl, sebezet, evit gwir, Azer zo gawe ket eur gor da respont. Neuze 'la, he devoa gwelid ha klevet en he c'houz ar pezh o doa klevet an vevadegon hag ar pezh o doa gwelid gant daoulagad digor ha d'uz mat. Hag aman, n'helle ket benan.

E gwirionez, nevezint ez eus en eun in bennek, nemet spered Azer en em zav, holl a-bez, a-vele d'an diouganou-man hag a denn da rei da gredi e vele ganet fenez war ar plouz, en eur c'hraou, ar Mesias zed- det abou pevar mil bloz. Despener pold Israel ha Roue ar bed holl!... Nann! nann! pell pell diou- dan, seurt sorc'hennou, tra ha n'hell diouan nemet e spered merc'hed ha pastored!

Gant eur jesir l'ep hag eur vouez c'hara, e ra da Lia sevel diouz he c'hoaz:

— Deus, emezan, mo a va a ziskouez d'it da Vesi- as!...

Ambiorix ha Domitillus, heiget ma out, war an

laol, gant diskredoni Jonathan hag e vignoned, o doa en em dennel, en eur ziviz, erméz e gêr Bremen, o c'halonou a oa enkreuzet meurmet. Ezomm o doa da ziret, etrezo o-daou, war an holl destenion o doa c'riet d'ezo kuitaat o c'hetet ha kêr Rom, treuzi ar mor, hedan aochou ar Grés, redek dre holl an Ejipt, evit klevel, dre c'henon ar gwizieka hag ar fura etouez ar poblou, o c'hredien diwarbenn amzer da zont ar bed.

Ar Cheik Ambiorix en doa, da zentañ, lavaret, ke-navo d'e Arvorig, gant ar c'hoant-ss, dastum skiant, furnez, anaout ar Wirionez, en eur glask roudou ar Zant, ar Roue, ar Prins bras diouganet ha gedet dre holl. Dont a reas da Rom, kreizenn ha sklerijenn ar bed, en ali kaout eno eur c'helou bonnak anezan; hag eun deiz, Domitillus hag hen, azezel kichen ha kichen dirak kador eur fillozof brudet, o 'n em zantoul douget an eil daved egile, a reas anaoudegez hag a deuas hep dile da vezan migoned. O-daou war an dro, en em rojont da zereñt Jehovah, Doue ar Juzevien, hag o trojont kein da Jupiler, Appolo, hag an douen all. Foulzel neuze gant an henvelep youl, e oant el da redek henchou ar bed, an henhou-ze bet digoret gant dour ar Romaned ha frankiz, drezo, da vale e pep bro eus an douar.

Shudiel o doa, e Rom, ar zeblanchoù a roe da gredi e oa eur rummad nevez e gantvejou o vont da zigeri hag eur ouenn dud heb he far o vont da ziskenn war an douar. Klevel o doa eus genou Virjilius, koulz lavaret, pebez krounder, a dilee dont da gloza an amzer c'haro galvet e oad an honar » ha da lakaat da ren oad aour an evurusted hag ar poc'h... Gouzont a reont e oa lavet an diouganou, ken stank betek neuze, evel pa vije war nez dont an Hini a oa bet keil diouganet... En kement bro e oant tremenet, zeblanchoù all a oa dilee da gredvaat o c'hredon ha da greski o fizians. Brud a oa e pep lec'h e llec eur Zalver genel en eur vro vihan ha dister, warzu ar zao-heol, ha leorjou ar Juzevien e oa skrivet fréz enno ano ar gêr a dilee ser-vijout d'ezan da gavell...

Pebez levenez evit an daou glasker pa en em gavjont dirak kêrig Bethleem, an hini o doa lennet he ano pa ziongané ar profed pelec'h e c'hanje ar Mesias, Eur' heol dister, eur gêr dister, hag er gêr-ze, eil lec'h disteroch c'hoaz, daoust ha gwir e vefe e tere ouz ar Zant, ar Prins, ar Zalver, kemend-all a baourentez? Hag ar Juzevien, ar re a oa bet dibabet da rei ar vuhez d'ar Mesias, a respontie ne oa nemet sord'henn diboull kemend a dec'he digant ar menoz o doa krouet en o spereñt hag a rê gant ar Mesias eur roue. Roue ar rouaned ha trec'hour an holl dre'hourien. Hogen, piou a oar, gwelloc'h eget, petra 'zo skrivet en o leorjou sakr? Kerzet o deus Iel, a-viskoaz, ouz ar gon-lou, pa oa ar re all en denvalijenn; piou a c'helle enebi ouzo ha dont aze, en o c'hêr, d'ar mare ma tie o sperejou bezan heuzet er sklerijenn, dont da lavaret d'ezo: « Fazio a rit! Ar gwir Mesias n'eo tamm c'bet an hini a c'hortozil! Me, ar pagan a zisprizit, ma ne garit na dibri gantan, na stoka outan penn ho piz, me eo an hini a anavez ar wirionez hag he disklerio d'feoc'h? »

Ambiorix ha Domitillus, pa gredas d'ezo bezan arvu er pal, a zant evit ar wech kenañ, arvar ha difizians o 'n em zitan en o c'hreiz, el lec'h ha d'an eur ma sonje ganto bezan karget a levenez hag a fizians!

Ha koulskoude, eme Domitillus, penós e kavrit-hu an dras-man: E Rom, ez eus eun impaler, hag e plez ar hed holl dimantan, eun doue hag e stou holl bennou ar grouadrien dirazan, ha seth e vijemp deut ni aman da glask eun all henvel outan? Daoust hag eur Mestr henvel ouz Agostus hon deus ni mall da gant?

— Dizroomp! eme Ambiorix; dizroomp davelo, ha neuze, klaskomp anezo betek poull o c'halon, rak aman, e gwirionez, red eo d'emp... « nenn pe vezuil »

DIR-NA-DOR.



Ar Breizad

*Da c'hizioù e dud koz, start betek ar maro;
Didrouz hag amzerier, diehoant da velet bro;
Dijal hag hep ezomm, piniatik gant netez;
Gant an nebeud en deus e ra vad d'an nesa;
Kalet ouz ar poanion, ampart e pep labour,
Ar Breizad ve diclamm, ma n'evie nemet dour.*


Kervennic.




AR GWENNILED



Ter ha leunen.



Tre ma c'he-rig hag ar ma-ner, Tre ma c'he-rig hag ar ma-



ner, Eur we-no-jen-nig a ga-ver, Eur we-no-jen-nig a ga-ver.

Tre ma c'herig hag ar maner
Eur wenojennig a gaver;

E kaver eur wenojenn wenn
Zo emni eur wezenn spern-gwenn;

Hag hi karget a vokedou
Hag a blij da vab an aotrou.

Me garfe beza bleun spern-gwenn
Ma ven tapet gand e zourn gwenn.

Ma ven tapet gand e zourn gwenn
Gwennoc'h eget bleun ar spern-gwenn

Me garfe beza bleun spern-gwenn
Ma ven laket war e varlenn.

Mont a ra kuit diganeomp ni
Pa deu ar goanv barz an ti;

Mont a ra kuit trezek Bro-Chall
'Vel ar gwennili o nijal.

Pa zistro an nevez amzer
E tistro adarre d'ar ger.

Pa zav ar bleun spern er prajou
Hag ar bleun kerc'h barz ar parkou;

Ha pa gan ar pinterigou
Kerkoulz hag ar sidamigou;

Dont a ra da heul ar festou
Dont a ra c'hoaz d'ar pardonioù.

Me garfe gwel't e peb amzer
Bleuniou ha festou 'barz ar ger.

Ha gwelet ar gwenniled
O nijal, dre aman, hepred;

M'o gwel'te, laouen, o nijal
Bepred e beg hor chiminal.

Barzaz Breiz.



MIKAEL AN NOBLETZ

1577-1652

Mikael an Nobletz e Douarnenez

AN EKZAMIN KATEKIZ

Evil tizout muioc'h a dud, Mikael, goude beza kalz pe-
det ha plustret, en em eleवास
gant an aotrou person, Yann
Capitaine, diwarbenn an doar
re wella da c'houenn tud
Douarnenez ha d'ober d'ezo
deski o relijion. Lavarit d'ezo
enne ar misioner, e rankit hi-
viziken, diadon boan da jom
hep tostad ouz ar zakraman-
chou, respont d'ar goulenno
a vezo srot d'ezo var ar reli-
jion. Ne vo goulnenn diganto
nemet ar pezh a iliz pep kris-
ten anout : ar misterion bra-
sa eus ar relijion, gourche-
mennoù Doue ha re an Iliz,
ar pelec'h eo latin hag e bre-
zoneg.

An aotrou person a reas
evel ma c'houlnenn digantan
hag a zisklerias ar gado-bre-
zeg e ranke an holl, evil tos-
tad ouz ar zakramanchoù,
mont d'an ekzamin var ar
chatekiz ha kaout en testi-
da verka ont desket a-walc'h
Iliz e kargz Mikael, an aot-
rou Bennek hag eur beleg all
d'ober ar goulenno an eksa-
min.

An dud a oa vel sebetz, pa
vo gwelet Mikael o pigant
er gador vluereh an aotrou person, e N'e ket dies, emez-
an, ar pezh a c'houlnenn diganto. Gant eun tammig
poan e teot bann da zesk misterion ar relijion hag ar
pedennou. Ha neuze, selouti, me ho sikouro. Bep sul ha
gouel e vezin diouz ar mintin e iliz Ploare ha d'ar par-
tinez e chapel santz Helena. Ouzpennez, er chapel-se e
rin skol diou wech bemdez, diouz ar mintin ha diouz un
noz. Kompren a rit ne c'helle ket an aotrou person ober
dishevel d'oc'h ma ra. Eur c'hristen a iliz anout e reli-
jion.

Prezegenn Mikael a reas fizioz d'an dud, ha ne voe
ket kalz o klask emeli. Dont a rajont d'ar skol gategiz,
ha niveruz zoken, eus k'ez iliz ar mision. Kement a deure,
ma rankas ar misioner klask an tu da veza sikouret, ha
setu anan penos e'ch en em gemeras. Ranna a reas an dud,
ar merched, ar gwazed, e bandennou bihan, pemp pe
c'houec'h, hag e lavare d'ezo deski eur gentel pe pur he-
den. Hen a displege bann ar gentel dirazo, hag a lavare :
« Breman lavarit ken etrezoc'h var va lenz, ha bremaek
e teun da velet ha gouzout a rit. » Hag ez ae bann d'eur
vandenn all.

Goude ar brezegenn diouz ar mintin, e c'halve ar re
zesketa, e displege d'ezo eur gentel, ha d'ar partinez, e reo
ontou goulenno dirag an holl, ar respontchou a deus brezo :
« Gwelet, eus ar misioner, n'eo ket dies deski ar relijion. »

A-wechou, e kemere kement a dud hag a oa c'houlen-
nou en eur gentel. Pep hini a zeske mat eur goulen hag
eur respont ha da c'houde o deske d'ur re all.
Mikael ne gemere tamm elian. E'fen deze fin en iliz pe
e chapel santz Helena, ez ae da glask an dud. Pa wela pes-
ketarion o kompenn o ronojion, e kerze d'o c'haout hag e
re d'ezo katekiz epad ma kembl'ent o labour. Mont a



rae dre an tiez da c'houlen
ha dont a rae an holl d'ar skol
gategiz ar re vras, ar re vi-
han, ar zovherien. Hinienn
da lavare a-wechou oa re
bouner o sperd evil deski
kement a draot « Nann, nann,
eme Vikael; sperd a walc'h
hoc'h eus d'ober ho marc'ha-
jou, da baka pesket, da gem-
pen ronojion; n'e ket diesoc'h
deski hent ar zividigez. »

Met setu amañ eur c'hoari
all. Ar besketourien hag an
dud dister divar ar muez, gou-
de beza gromolet eun tam-
